

# Naoned

## Staj gant Kentelioù an Noz

Kentelioù an Noz a aozo ur staj brezhoneg d'ar 24 ha 25 a viz Meurzh e kreizenn ar Gorriganed er Poulgwenn. Seizh eurvezh a gentelioù a vo e-pad ar staj. En tu all d'ar c'hentelioù e vo ur veilhadeg d'ar Sadorn noz hag ur bourmenadeg war an Aod Ouez d'ar Sul. Bod ha boued war al lec'h.

Prizioù : 65 pe 45 euro.

Evit gouzout hiroc'h :

Kentelioù an Noz, 10 straed Bourget, 44000 Naoned. Pgz : 02 40 20 39 74. Postel : kann@netcourrier.com.

Lec'hienn : [www.bretonnantes.org](http://www.bretonnantes.org).

## Clask-teñzor e brezhoneg

D'an 12 a viz Mae d'an enderv e vo aozet he fevare klask-teñzor gant ar gevredigezh Kentelioù an Noz. "Teñzor ar Gaouenn" a ginnigo d'ar vrezhonegerien ur valeadeg leun a fent e straedoù Naoned er bloaz-mañ. Tu a vo da zizoleiñ kêrbenn istorel Breizh en un doare bourrus ha broudus, tro-dro da gastell Duged Breizh adkempennet ha digoret en-dro nevez-zo [s.o. *Bremañ* niv.304]. Mont buan e darempred gant Kentelioù an Noz rak termenet eo an niver a blasoù. Priz : 5 euro.

Kentelioù an Noz, pgz : 02 40 20 39 74.

## Ai'ta! e Kastell an Duged

D'ar Sadorn 10 a viz C'hwevrer e oa devezh digoridigezh d'an holl Kastell Duged Breizh adkempennet. Kinniget o doa izili skourr naonedat Ai'ta !, nevez-krouet, un tañva d'ar brezhoneg da weladennerien ar c'hastell e-kerzh an abardaevezh. Aozet e oa bet ar c'hentelioù en ul lodenn dizimplij eus ar Post. Sonet e oa bet gant Bagad Naoned e-kreiz porzh ar c'hastell a-raok an abadenn tañva d'ar yezh. Peder c'hentelig zo bet aozet. E-tro 60 den o doa kemeret perzh hervez ar stourmerien, tud a bep oad hag a bep lec'h (eus Breizh met eus Lyon pe Rouen ivez da skouer). Kalonekaet e seblant bezañ skipailh Ai'ta ! Bro-Naoned gant berzh o ober kentañ.

Evit gouzout hiroc'h : <http://aitabronaoned.free.fr>.

## Stummadur gant DAO

Deskiñ d'An Oadourien a ginnig un devezh-stummañ war dibarderioù brezhoneg Bro-Dreger, renet gant Gireg Konan hag Alan Tudoret. Dalc'het e vo an devezh-se d'ar Sadorn 24 a viz Meurzh e Kreizenn Abherve, 15 straed F. Menez e Sant-Brieg, etre 10e beure ha 5e goude merenn. Digor eo ar stummadur-mañ d'ar gelennerien brezhoneg d'an dud deuet, koulz ha d'ar re e soñj da dapout barregezh war ar vicher-se. Priz an devezh : 20 euro evit an izili, 40 euro evit ar re all.

Evit gouzout hiroc'h :

Frederic Ollivier - DAO, Ti ar Vro,

6 plasenn Gwirioù Mab-den, 29270 Karaez-Plougêr.

Pgz : 02 98 99 94 24. Lec'hienn : [www.dao-bzh.org](http://www.dao-bzh.org).

Postel : [dao.breizh@wanadoo.fr](mailto:dao.breizh@wanadoo.fr).

## Stummadur dibaouez e Roazhon

Prantadoù stummañ a vo kinniget gant Pol brezhoneg Skol an Emsav etre ar 16 hag an 20 a viz Ebrel. Liveoù 0, 1 ha 2. 35 eurvezh kentel a vo kinniget d'ar berzhidi etre 9e ha 12e30 hag etre 1e30 ha 5e30. Dek den dre strolad d'ar muiañ. Ar stummadur-se, micherel (500 euro) pe hiniennel (200 euro), a c'hell bezañ skoazellet gant kefioù an embregerezhioù ha strollegezhioù.

Evit gouzout hiroc'h :

Pol brezhoneg Skol an Emsav,

25 straed Pierre Martin, 35000 Roazhon.

Pgz : 02 99 38 75 83.

Postel : [sae.bzh@wanadoo.fr](mailto:sae.bzh@wanadoo.fr). Lec'hienn :

<http://perso.wanadoo.fr/skol.an.emsav/>.



Gwisket e oa bet t-shirt Ai'ta ! gant an Dugez Anna...